



DISPUT

COMPOSET A NEVEZ

ETRE

UL LEONARD HAC UR C'HERNEVOT.

SELAOUIT hac e clêfot , hac e clêfot cana
Un Disput so compozet a nevez er bloa-mâ,
Zo grêt gant ur C'hernevot ha gant ul Leonard,
Ebars santier Tregueris o fumi ur c'horniad.

Nac er bloavez mil eiz cant ouspen seiz ha trêgont,
Eo bet savet an disput un nebeut divergont ;
Pepini a bretante difen caus e gontre :
Deut d'o c'hlévet o tisput an eil ouz eguile.

Ar C'hernevot.

Ar C'hernevot a c'houlenn diouz ar pot a Leon :
Lavar din pezh pansion a c'heus en da ganton ;
Te na c'heus qet a grampoez na galetez ive :
Me , va mignon , em beves an eil hac eguile.

Al Leonard.

Tao din demeure da grampoez , da c'haletez ive,
Ne c'houlennàn' nep fêçon an eil nac eguile :
Ro din un tam qig eugen hac un tamic qig moc'h
Da zebri gant fars gûiniz , a zo delicatoc'h.

Ar C'hernevot.

Tao din divar ben ar c'hig, se n'eo qet un dra vad;
Parlant din demeus ar yod a gavàn delicat :
Ro din un tam yod silet hac ur banne lèz tro ,
Me lèzo ar c'hig eugen gant an neb a garo.

Al Leonard.

Trahissa res, va mignon, bremàn da santimant;
Evit paea da fermou e ranqes caout arc'hant ;
En ezom deus a arc'hant e teuez d'o guerza ,
Ha ni, entrezomp, Leonis, a voar dont d'o laza.

Ar C'hernevot.

Credi a ràn, va mignon, nac e mout da farçal;
Peneverde ma teuez em brò da glasq segal,
E viges bet perisset, rac ne poa qet a hed ;
E blaveziou ar guernez, ni n'eus da recouret.

Al Leonard.

Ah! ah! eme'l Leonard, mad ec'h eus grèt toulla;
Dont a vouie Qernevis e Leon da glasq bara.
Peneverde Leonis, dre ma zint oll tud vrao
O devije bet Qernevis assur mad var o fao.

Ar C'hernevot.

Un tamic out effrontet, Leonard, bragou-bras;
Ma ve grèt dide prouvi, e vez nec'het, siouas!
Lavaret ve Qernevis en da vrò o clasq boued;
Ma ve grèt dit er zouten, meus aon na vez nec'het.

Al Leonard.

Hac e ranqen caout testou, memes deus da gontre,
Hac e tefote cant din a so c'hoas en bue,
Pere so bet soulaget ganemp-ni en hor brò,
Hac a drugare Doue n'en dint qet oll maro.

Ar C'hernevot.

Credi a ran, va mignon, na c'heus sur tam rêson,
Qerse gafe Qernevis rancout mont e Leon ;
Goude beza bet maguet a grampoez, galetez,
Rancout monet e Leon da zebri patates.

Al Leonard.

Poan a res din em c'halon, o clêvet da gomzou ;
Me meus guelet Qernevis na pa vijent em brô,
O sailla gant ar goachen goude sila ar yod
Gant ar c'hol ha patates, pa ellent, vel tud sot.

Ar C'hernevot.

Evit na col na panes na zeus qet em c'hontre,
Mes beza em eus irvin ha patates ive ;
Traou int an excellanta evit ober souben,
Laqat assambles ganto un nebeudic trinchen.

Al Leonard.

Scuiza a rez ac'hanon, poan a rez din em pen
Gant da irvin, patates, hac ive da drinchen :
Ar seurt-se a vez roet em brô d'ar chatal mud ;
Noupas da oza souben da bresanti d'an dud.

Ar C'hernevot.

Hansav din da legumach evit ober souben,
Pe rez fae var irvin, patates ha trinchen ;
Rac evit ebars em brô ne zeus qen nemeto :
Noblanç ha paysantet, oll a zreb anezo.

Al Leonard.

Al lugumach em brô-me zo pour ha carotes,
Oignon, col-guen, col milan, ouspen hor bez rabez ;
Istr, fao hor bez ive, col-fleur hac articho :
Cetu eno'f lugumach a implijer em brô.

Ar C'hernevot.

Consanti râh qementse na ganez, va mignon ;
Mes n'oar qet qer caer gûisqet en escopi Leon
Evel ma zeo Qernevis gant o chupennou gloan
Hac o chupennou mezer a vez ganto dindan.

Al Leonard.

Tao din, eme'l Leonard, gant ta chupennou gloan
Ha da chupennou mezer a vez ganez dindan.
Da vragueyer discaret ha da c'hourigoù ler :
Ni entrezomp Leonis a zoug oll en mezer.

Ar C'hernevot.

Gûir mad e zeo qementse ganez-te, va mignon :
Mezer caer zo en Leon, mes grêt int difêçon ;
Espicial ar goazet a gavân divalo,
Rac calz anê zo cazi collet en o bragou.

Al Leonard.

Nac ar botret e Qerne o deus roqedennou
A so grêt evel sier da zouguen sac'hadou ;
O bragueyer zo formet a ziou pe deir riden,
O frennestou zo goal vras da chom hep stalafen.

Ar C'hernevot.

Nac ar merc'het a Leon o deus coefeyer bras,
Na pa vezont-i fachel e vez cruel o faç ;
Mes ar merc'het en Qerne o deus coefeyer bêr
Tout int laouen a visach, tout o c'haver ceder.

Al Leonard.

Tao din a verc'het Qerne gant o c'hoefeyer ber
A zo endro d'o bisach eguis un torchouer ;
Lostou o deus o c'hernou, eguis ar zaout em brô,
Vit en em zigueliena e servichont dezo.

Ar C'hernevot.

Ne allàn mui contesti, cedi a ràn ganez ;
Ne qet possubl resista eneb ar virionez.
Me a baeo boutaillad eus a greis va c'halon
Evit en em unani ganez, pot a Leon.

Al Leonard.

Cetu ni camaradet, ar C'hernevot ha me,
Ne vézo den incredul demeus a guementse.
Un dra zo bet prouvet dirac calz eus a dud,
Ar rézon-mâ a finis etrezo an Disput.

Al Leonard hac ar C'hernevot.

Ar son-mâ so composet gant ur Breiziad farcer,
A hanavez tud Qerne, re Leon ha Treguer ;
Oll int lapinet subtil, mignonet a fêçon,
Hac en ped amzer oll dign eus an titr a Vreton.

Hac en peoc'h hac en brezel o deus ar santimant
Eus a botret courajus, dudies ha vaillant,
Ha mar be ret dê un deiz, neus fors eu pez tachen,
E vo cavet adare *Celtiqet tor-e-ben.*

~~~~~

**AR C'HEMENER.**

Var ion : *Calz a amzer ameus collet.*



**E**UR C'hemener ne deo qet den,  
Fardi bidao, oao, oao, oao, oao ;  
Eur C'hemener ne deo qet den,  
Neo nemet eur C'hemener hepquen.

Ne dle qet beza entêret ,  
Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;  
Ne dle qet beza entêret  
Nac en ilis nac er vêtet.

Hoguen e corn ur soulet qerc'h ,  
Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;  
Hoguen e corn ur soulet qerc'h ,  
Oll chass ar baros var e lerc'h.

Ha peb a gaz ha peb a gui ,  
Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;  
Ha peb a gaz ha peb a gui  
Peb a lunedìou var o fri.

Ha peb a fleur en o guinaou ,  
Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;  
Ha peb a fleur en o guinaou  
Da gana *Requiem* da vuntrer al laou.

Pa ha'r C'hemener d'an dançou ,  
Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;  
Pa ha'r C'hemener d'an dançou ,  
E carg e sac'h a vesqennou.

Evit ma laro ar merc'het coant ,  
Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;  
Evit ma laro ar merc'het coant ;  
Ar C'hemener en deus arc'hant.

Pa ha'r C'hemener da c'hriat ,  
Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;  
Pa ha'r C'hemener da c'hriat ,  
Ne ra nemet cana ha c'houtellat.

Nemet cana , cravat e ben ,  
Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;  
Nemet cana , cravat e ben ,  
Ha muntra al laou hac ar c'hoen.

---

---

## CHANSON

VAR SUJET AL LABOURERIEN DOUAR.

**S**ELAOUIT oll, hac e cléfol eur guentel  
A zo grêt a nevez var buez al Labourer ;  
Un etat a zo poannius, n'o deus qet calz a repos,  
Neb e gra gant paciantet a c'honit ar Barados.

Eul Labourer en em expos d'an amzer,  
Qercoulz d'ar yenien evel pa vez an domder ;  
Pa vezerc'h, scorn, caserc'h, grizill, curen, glao hacavel,  
Baleit, hac qefot ato en e barq al Labourer.

Eul Labourer zo habillet e lien,  
Ne ve qet brao bemdez evel ma ve ar vourc'hizien ;  
E habit zo struillennec, gant an douar labeet,  
Calz a dud a renq e gaout, hac a granch ous e velet.

Differanç a zo etre cundu ar bourc'hizien  
Hac an hini a ra lod demeus al labourerien :  
Ar re-ze o deus qig ha pesqet, bara guen, souben vad bepret,  
Hac eul Labourer, tamou yot, bara sec'h ha dour bervet.

Eul Labourer, baleet elec'h ma caro  
A vezo qaquetet, calz a dud en disprizo ;  
Gouscoude qement zo er bed, mar qeront dont da sònja,  
Eo divar goust al Labourer e ma ar bed oll e veva.

D'ar c'henta poent, e ranqo eul Labourer  
Paea taill d'ar roue hep bloas un teir pe peder.  
D'an eil pa renq paea e vestr, ma na vez prest e arc'hant,  
E vezo foar var e zanves : homàn eo an nec'hamant.

D'an drede, e renq paea an deog d'ar person,  
Evel ma zeo ar c'hustum, qementse a zo rézon,  
Ha rei o c'hest d'ar véleyen, an aluzen d'ar beorien;  
Hac evit na fazint qet, ar güir d'o servicherien.

D'ar bêvare, pa zemeer ar vugale,  
E renqer o argouli, an danvez a izel-neuze;  
Ha mar be rust ar mibien-caer, antronos goude eureuji,  
Ma na ve prest an argoulou, er pillint evel bleizi.

D'ar bempet poent, mar sonch dont da brocedi,  
E renq caout eur yalc'had vad a arc'hant da zistribui:  
Neus nac avocat na procuror, greffier, huissier na serjant  
A rae an distera tol pluen evitân anes caout arc'hant.

D'ar c'houec'hvet poent, e renqo laqat evez  
Da zioual eus an tan da gregui en e zanves;  
Ennes a zo un élemant pa ve eur vech alumet,  
A laqa calz da vont d'ar bas, ha memes da glasq o boued.

Ar seizvet eo al laeron gant o oll ardou,  
A binç eul Labourer hac a fouill e c'hodellou;  
Ha pa ell atrap ar yalc'h, netra gantân na lezer;  
Cetu penos goude e oll boan e za madou al Labourer.

Eul Labourer c'hoas a vezo caqetet,  
Hac e zanves o vont, n'en deus guer da lavaret.  
Endra ma e mâ o conta e arc'hant, mignon a c'hoarze dezân.  
Ma c'hallent e guignat e raent, hac ober goab anezân.

Ar chanson-mâ a'ganer etrezoc'h, Bretonet,  
Var un ér excellent a nevez eo composet,  
Rac-se ta, me ho suppli da brena peb a gopi,  
Evit e lenn ha passeal ho chagrin ha melconi.

FIN.